

(303)

Var an Tempest horruhl  
 en devoe lec'h e Montroulez  
 an 2 a vis c'houverer, deiz gouel ar Chandelour,  
 vardo unec heur anter diouz ar mintin,  
 er bloa 1836.

Doze oll galloudus, Mestr an elemantchou,  
 Cetu ni ta hirio preiz eus an tourmantchou!  
 A boan eus pèvar bloas, dre ur vocen euzus, (1)  
 E voamp oll reduset en ur stat horrerus,  
 Ha velomp var ho[ur] bro rën un Tempest counnar,  
 Hac a laca fremi ar môr hac an douar.....

(304)

Petra eo an drous-se a vranl ar forestou,  
 A strael er menezjou, a scrich en draonenniou?  
 Perac an drous hir-se, ar yuderes hep fin  
 Deus an elemantchou, diouz an nôs d'ar mintin?  
 An horruhl avel bis, svinget dreist hor pennou,  
 Dindan eun ênv ténval e lang e dempestou.  
 Yudal, trei ha gourdrus a ra gant trous spontus,  
 Hac e venas dreist-oll Breiz - Izel maleurus!  
 Goaguennou ar môr don a sav vel menezjou,  
 Hac en a flonch qerqent e fonç an abimou;  
 Ar gouez, ar c'hoajeyer, fraillet ha difframmet,  
 Hac ar ravach dre oll a ra en em velet;  
 Ar grizill, ur môr glao a güez vel un diluch;  
 Hac a laq en dro deomp qement so en distruch.  
 Ar voasiouigou so en goasiou bras chechet,  
 Hac an oll rivierou trio vardo debordet;  
 Lodenou menezjou so en em distaqet,  
 Pontchou so distrujet, ha ties discaret:  
 O restojou a heuill fulor an doureyer:  
 Anfin, nemet horrol dre oll mui na veler.

(1).- Ar Cholera-Morbus, pehini a reas ur ravach an horruhl a voe biscoas, er bloavez 1832. Lennit  
 Bulletin Montroulez eus ar bloa-se, imprimet e ty Lédan. [Note de A. Lédan.]

434

An douz hac an avel, en ur seurt tintamar,  
 A ra crena betec e calon an douar,  
 Var ar mör, al lestri, tolet ha distolet,  
 A string var ar riblou corfou martolodet.  
 Ar bed so menacet da zistrei d'ar c'haos,  
 Hac a seblant mesqa hac an deiz hac an nös.  
 Peur e velimp ar c'halm en hor bro beour o rën,  
 Hac ar boner etouez an oll bobl christenien!  
 O Tempest spouronus! arrêtit ho fulor....  
 O va brö! ô natur! ô theatre a horror!....  
 O Doue! chadennit an tourmantchou dirol,  
 Ha roit, ni ho ped, ar c'halm bremañ deomp oll.

(305)

A. L. M. Lédan.

(Vol. IV, p. 303-305.)

---

Aventissamant  
 Da veza scifet ha staguet en eur sacristiri.

Mar oc'h eus c'hoant da goseal,  
 Hastit buan mont en plas all;  
 Nemet beza ve necesser,  
 Ama james na gauzeer;  
 Hac a vez izel a larfet  
 Ar pezh ho po da lavaret.

Le Quellec, Person Plouguiel.

(Vol. IV, p. 305, suite.)